


Ave, maris Stella

Ton latin

*Salud, Dor an nenvou
Steredenn ar moriou,
C'houi 'zo mamm da Zoue
Ha gwerc'hez koulskoude.*



*Klevit salud santel
An arc'hêl Gabriel.
Er c'hontrol da Eva
Roit d'eomp gwir beoc'h ha joa.*

*Torrit nask ar pec'her,
D'an dall roit ar sklerder;
A zroug hon diwallit,
Mil vad warnomp skuilhit.*

*Diskouezit ez oc'h mamm :
Grit ma vo skanv hor samm,
Ha ma vimp selaouet
Gant ho Mab benniget.*

*Gwerc'hez dispar meurbet
Dousa hini 'zo bet,
Grit d'eomp beza dalc'hmat
Dous ha glan en hor stad.*

*Grit d'eomp bale bemdez
War hent ar santelez,
Ma vimp atao eürus
En eur welet Jezuz.*

*Meulomp an Tad krouer;
Meulomp ar Mab Salver,
Meulomp ar Spered-Glan,
D'o Zri enor unvan.*

Leor hor mammou koz



Gwechall ne veze ket kavet e pep parrez diou ha teir skol evel breman, ha ne oa ket ken-nebent ar « skritur moull », vel ma lavarer e Bro Dreger.

Kredit pe na gredit ket, hon tud koz a zeue a-benn d'ober leoriou ha d'o lenn hep beza bet biskoaz o tomma bankou ar skol. Selaouit an istor-man kontet gant souezusa misioner en deus prezeget biskoaz e Breiz-Izel, sant Visant Ferrier.

« Bez' e oa, emezan, eur
« vaouez ha na ouie na lenn
« na skriva; desket he doa
« hepken, evel ar gristenien

« all Hon Tad p'hini a zo en Nenv, Me ho salud Mari, Me a gred e
« Doue, h. a. Met d'an oferenn da sul, e vije ganti eul leor en he
« dourn, he daoulagad o para warnan hag an daerou o redek puilh
war he dioujod.

« — Petra 'ta a lennit aze ?, a c'houlennas diganti eun den des-
« ket; bezit ar vadelez da ziskouez d'in ho leor. — O, emezi, n'oc'h
« ket muioc'h gouest da lenn em leor, eget ne doun-me da lenn en
« ho hini.

« Evit ober plijadur d'an Aotrou, e tigoras dirazan he leor bihan.
« Ne oa ennan nemet peder bajenn : *unan wenn, unan ruz-tan, unan
« du-pod, hag unan alaouret.*

« Met, emezan, n'eus netra skrivet, n'eus lizerenn ebet er beder
« bajenn-se ! Hag ar vaouez da respont : « Er bajenn genta, en
« hini wenn, e lennan madelez dispar va Salver ha Santelez ar
« Werc'hez Vari; pa sonjan pegen dishenvel oun diouto dre va
« fec'hejou, e red an daerou eus va daoulagad.

« Pa sellan en eil bajenn, an hini ruz, e ouelan adarre, rak al
« liou ruz a zegas d'in sonj eus Pasion va Salver hag eus e wad
« skuilhet evit va frena.

« Penaos chom hep hirovudi o sellout an deirvet pajenn, an
« hini zu ? Gwelout a ran neuze tenvalijenn an ifern ha poaniou
« skrijus an eneou daonet.

« Lenna a ran erfin pa bar va daoulagad war ar bajenn ziweza,
« an hini alaouret. Va spered a nij etrezek an Nenv. Seblantout a
« ra d'in tanva dija gloar hag eürusted an Aotrou Doue. Tridal a
« ra va c'halon o sonjal em bo hep dale perz en eürusted-se hag e
« lavaran a-greiz kalon :

*Berr kavan an amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz
E gloar ar baradoz.*

Ar Spered-Santel, a lavare sant Visant Ferrier, en doa desket
d'ar gristenez vat-se traou kant kwech kaeroc'h eget na gaver e
skridou an dud. An distera a zo a c'heil da vihana lenn *leor hor
mammou koz.*

GWASTINO.